

(315 recto)

Gwers ar paour.

Eun deves e voa deuet eur paour da c'houlenn loja (1)
 Nen devoa na tog na bonnet na rochet dindana.
 Ar c'hreg evel ma e goelas certen a fatigas
 A pa voa difatiget de pedi e teuas
 Da zont e Kever an tan da toma ag asseza.
 Ag i e lemel e davancher a voa var e barlen
 Da dol dreist ar paour Kes da c'holo e groc'hen.

— Petra an den a zo aze evel e man enes
 — Eur paour e ma friet o pes outan trues
 A nan deus na dog na bonnet na rochet dindanan.
 An ozach en ti zo deued peprest da Kefek'het desan
 eur rochet ag eur bonnet pa nen devoa tam dillat

Pa voant oc'h tol e koanian e lavaras de briet
 O merc'h a c'houi a Kousko en eur memeus goele
 ag ar paour a me a yelo vit tremen eur nosveg.

(315 verso)

Pa voant ed en o goele en deus goulennet
 dar paour: c'houi zo pelzo evelen e vale dre er bed
 Daoust an edou ag i zo mad en o gonideges?
 Ja ia emezan mad int en o gonideges
 ar segal ag ar quinis ag ar lin a peb seurt fues

Ja ia a mezan mes maro a vezo
 a darn a varvo kernes a darn all a varo simpl

Darn al a varvo er bresel ar fin deus ar walen

— En possubl e va Doue e ve gwir kemen se

(1). Le j (de: loja) écrit en surch. sur un g.

178

- Eo sur e mesan quir eo Kemen se
 evel e zeo maro o briet en o goele.
 — impossibl e va Doue e ve quir Kemen se
 e ve maro va briet a lamet digan ne!

Ag en diritourn er mes da ellumi ar golo
 eruet e tal ar goele e voa e briet maro
 ag eun el quen en e Kichen da del'hel ar golo.

Ag en diritourn adare da Kaout e Kamarad
 Al pe e diritournet neñ deus Kavet nemik mad
 ar bonnet ag ar rochet en pen ar pluec fleget.

(316 recto)

Lekeom ni on eneoù a brema e stad a c'has
 Al deom ni da voelet Jesus o c'has o c'has o c'has.

[pas de trad. franç.]